

EMSAV

mmmmm mm m mm m mmm m
 mm mmm mm mm m mm m
 mm mmm mm mm m mm m
 mm mm m m mm m mm m
 mm mm m m mm m mm m
 mmm mm m m mm m mm m
 mm mm m m mm m mm m
 mm mm m m mm m mm m
 mmmmm mm m mm m mm m

KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 8 - Eost 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

KENDIVIZ KENTAÑ : PENAO S URZHIAÑ AL LABOUR EMSAVEL . . . p. 191

 Gwriziennañ en Emsav p. 191

 An emsaver a ren e vuhez e brezhoneg p. 198

 Petra eo al labour emsavel bremañ ? p. 203

EIL KENDIVIZ : BUHEZ AN EMSAVER p. 206

 An Emsav evel kevredigezh p. 206

 An emsaver e kevredigezh an Emsav p. 212

Danvez an niverenn-mañ zo testennoù sonenskrivet kendivizoù bet renet en hañv-mañ tu bennak e Breizh. E kefridi tri displeger edo pleustriñ war grefen termenet ha respont goulennoù ur bodad aterserion.

Ne vo kavet amañ nag anvioù an displegerion nag anvioù an aterserion. Gant al lizherennoù A, B, K e vo meneget an displegerion; gant sifrennoù : 1, 2, 3, h.a., an aterserion. Testennoù daou gendiviz o vezañ roet amañ, e vo rakverket * kement testenn eus ar c'hendiviz kentañ, ha ** kement testenn eus an eil hini. Dre-se e tleo al lenner kompren an aroueziad *A evel-henn : displegadenn graet gant A da geñver ar c'hendiviz kentañ; *1-A : aters graet gant 1 ouzh A da geñver ar c'hendiviz kentañ; **B-8 : respont graet gant B da 8 da geñver an eil kendiviz.

Pedet eo al lennerion da zerc'hel koun ez eus amañ testennoù komzet dastumet diwar vandenn warellec gant nebeut-kaer a gemmadennoù. Na vent ket souezhet enta o kavout enno adlavaradennoù, hirderioù, ha dre vras doareoù ret pe voas an displegadennoù dre gomz.

KENDIVIZ KENTAÑ : PENAOS URZHIAÑ AL LABOUR EMSAVEL

*A Pal nesañ an Emsav o vezañ ar Stad Vrezhon, e ranker dibab an hent gwellañ evit e dizhout, da lavarout eo raktresañ ar pazennoù a gaso an Emsav d'an disoc'h-se.

An dek mil embregadenn bet lakaet dindan anv an Emsav abaoe pemont vloaz o klask mirout ar c'hoefoù kozh, ar chapelioù kozh, ar botoù koad kozh, ar yezh kozh, feiz hon tadoù kozh n'o deus ket kaset da belloc'h eget mirout Breizh er framm gall, da lavarout eo war he marskaoñ. N'o deus kaset da netra nemet da zigalonekaat an dud. Ar skouer int hepken eus ar pezh na zleer ket ober.

Sevel ar Stad Vrezhon a dremen dre an dispac'h hag an dispac'h a vez graet gant dispac'herion. Ha petra eo un dispac'her ? un den o sevel ur gevredigezh nevez a gas da get ar gevredigezh kozh, e gerioù all, a sav ur Stad politikel nevez. Un den stummet e rank bezañ an dispac'her. Eleze, e Breizh, ne zeuer da vezañ emsaver nemet dre ur stummidigezh termenet resis. Div bazenn gentañ ar stummidigezh-se zo : a) gwriziennañ en Emsav, b) ren e vuhez e brezhoneg. Ar re-mañ e vo ivez talbennoù hon div zisplegadenn hiziv.

*B Petra a dalvez gwriziennañ da gentañ ? Petra a dalvez kemer gwrizioù ? Petra eo ar gwrizioù ?

Tud 'zo a gred e teuer da Vreizh hag e kroger da vevañ evel an dud a zo e Breizh. An dud e Breizh a vez dre vras o c'hall-ekaat, - bremañ eo tost echu an tremen-se. Ar galleg eo a ren er vuhez kevredigezhel, ma n'eo ket ar spered gall. Neuze gwriziennañ a ve en em veskañ gant an dud hag ober evelto. Tud o deus kredet, ne gav ket din ez eus bremañ tud c'hoazh o krediñ se, e oa ret dont da Vreizh-Izel evit en em veuziñ er boblañs hag en em heñvelaat outi. An dud o dije graet se a vije holl deuet bremañ war ar galleg; dilezet o dije feiz o zadoù kozh, peogwir emañ ivez ar boblañs dre vras o tilezel an Iliz e Breizh, - (ar fideled a chom a chom dre voaz dreist-holl : n'eus emsav relijiel gwirion ebet; al luskad relijiel nemetañ eo an Oberiezh Katolik Gall a zo oc'h en em ledañ war Vreizh). Anat eo ne c'hell ket ar gwriziennañ bezañ an dra-se. Emañ ar boblañs o kouezhañ, n'eo ket kouezhañ ganti gwriziennañ. Petra e c'hell bezañ neuze gwriziennañ ?

Gwriziennañ zo klask e Breizh kement ober emsavel a zo bet araozomp. Tu zo da gavout oberoù emsavel e Breizh abaoe lakaomp

(*B) 1 000 bloaz; e pep remziad eus istor Breizh ez eus bet tud o deus kemeret damant ouzh Breizh, ouzh dazont Breizh, ouzh pobl Vreizh, ouzh tonkadur Breizh. Ar re-se, ar pezh o deus graet eo an Emsav. Ar gwrizioù a c'hellomp kaout eo hepken ar pezh o deus graet an dud-se. Tu a zo da sevel betek Nevenoe, met e gwirionez e savomp peurliesañ betek derou an Emsav a zo o ren bremañ, da lavarout eo da 100 pe 150 vloaz; resisoc'h c'hoazh, an Emsav emamp o vevañ ennañ a grog gant ar strollad broadel kentañ ha dreist-holl gant labour Gwalarn. Goût a ouzoc'h, betek brezel 14 ez eus bet tud o labourat war zanvez Breizh. Bez' ez eus bet istorourion, tud hag o deus furchet en dielloù ha savet istor ar vro. An darnvuiañ anezho a oa brogarourion, da lavarout eo e sellent Breizh evel ur vroad; ne sellent ket ouzh Breizh evel ouzh ur vro tonket da vezañ enteuzet e Bro-C'hall, - (an istorourion o sellout Breizh evel tonket da enteuziñ e Bro-C'hall ez eus anezho ivez; ar re-se hon eus gwelet dreist-holl abaoe tregont vloaz, tud peurliesañ o labourat er Skol-Veur c'hall ha na c'hellont ober eus Breizh nemet ul lodenn eus Frañs ha tonket a-viskoazh da vezañ gall). Hon istorourion gentañ a labouré e galleg : LA BORDERIE da skouer, unan eus ar re vrudetañ, en deus savet e holl labour e galleg. Evit gwir ne c'halle ket ober a-hend-all o vezañ ma ne oa ket ar brezhoneg gouest da zisplegañ ar pezh en deus displeget. An istorourion-se a c'hellomp sellout outo evel ouzh prienterion an Emsav.

Gant tud all ez eus deuet ur mennoz broadel, war ar mod barzhoniell. Kêrvarker da skouer a gomze eus frankiz Vreizh met hep lakaat ar frankiz-se evel darvoud politikel. Ur prienter eo bet ivez gant barzhed all ar rakvrezel kentañ, en un doare, met ne oa ket un emsaver er ster ma komprenomp bremañ.

E 1911 e voe lakaet evit ar wech kentañ ar mennoz brezhon war dachenn an ober politikel arnevez, gant krouidigezh ar Strollad Broadel kentañ. Ar re a oa e Ballon ar bloaz-mañ o deus spurmantet Camille LE MERCIER D'ERM a oa deuet eno ivez. Ur c'hozhiad eo bremañ, gant poan o vale, met ur monumant eus an Emsav eo evit gwir. Ken brudet ha tarzhadenn monumant Roazhon eo an taol c'hwitell laosket gantañ e 1911 da zeiz dioueliadur ar monumant-se, ma weled Breizh daoulinet dirak Frañs. Koumoulek e oa evelkent ar pezh a felle d'ar Strollad Broadel kentañ krouet gant LE MERCIER D'ERM ober eus Breizh.

E gwirionez, e krogas al labour fetis diouzhtu goude brezel pevarzek. Pa groger gant ul labour ne ouzer ket bepred, ne ouzer zoken nepred betek pelec'h ez aio. Breiz Atao, krouet e 1919, ne oa en he derou nemet rannvroelour, da lavarout eo emreneler. Un tammig lec'h a felle dezhi reiñ da Vreizh er ranndi gall, daskor gwirioù, frankizioù d'ar vro; un tamm eus Frañs e vije chomet, evelkent gant un tammig personelezh, ur parlamant e Roazhon, ha me oar. Moarvat o deus ar mennoziou

(*B) emdroet buan a-walc'h ha deuet eo tud vBreiz Atao da soñjal e vefe gwelloc'h goude-holl ober eus Breizh ur rannvro eus Europa. Ur mennad dispis-bras peogwir ne oa ket eus Europa, ha moarvat n'eo ket warc'hoazh e vo unan. Gant ar re-se koulskoude e voe prientet an hent d'an Emsav politikel.

Hogen ar re o deus lakaet an Emsav war dachenn an ober gwirion eo tud Walarn. Ar strollad dispac'her kentañ a zo bet e Breizh, ar re o deus kroget da zistrujañ ar gevredigezh kozh, ar gevredigezh c'hall a oa o ren e Breizh, eo tud Walarn, Roparz HEMON en o fenn. Lavaret o deus an dra-mañ : ne vo eus Breizh da vat nemet pa vo distrujet ar galleg e Breizh. Neuze o deus staget diouzhtu gant al labour, o deus kendalc'het da ziorren ar brezhoneg. Amañ e ranker menegiñ an daou zen a voe o diaraogerion, hag a bleustre abaoe ur c'hard kantved war an hevelep tachenn : ober eus ar brezhoneg ur yezh arnevez; an daou zen-se oa VALLEE ha Meven MORDIERN, - (eus VALLEE e ranker e-se ober dispac'her kentañ istor Breizh). Tud Walarn a gemeras da bal sevel ul lennegezh er brezhoneg diazezet gant VALLEE. Ar yezh krouet ganto zo deuet da vezañ yezh ur gevredigezh nevez, hag aze emañ ster an dispac'h brezhon; - (pa soñjer er ger "dispac'h" e weler diouzhtu tud o sevel bardelloù dre ar straedoù, o fuzuilhañ, oc'h en em lazhañ, o tiskar ur gouarnamant hag o lakaat unan all en e lec'h. Skeudenn romantel an dispac'h eo se. An dispac'h zo da gentañ un dra eus ar spered hag eus ar vuhez, un dra eus ar gevredigezh. An dispac'h zo krouiñ ur bed nevez, krouiñ ur gevredigezh nevez. Pa seller ouzh an dispac'hoù a zo bet er bed e kaver bepred enno fin ur bed kozh ha derou ur bed nevez. Pa seller ouzh an dispac'h gall, an dispac'h rusian, e weler ez eus bet kaset da get drezo ur gevredigezh ha savet en he lec'h ur gevredigezh nevez. Hag e Breizh ivez n'eus diskoulm all ebet nemet kas da get ar gevredigezh direizh, - ganti emañ ar vro o paouraat, o tiboblañ, o tizeriañ, - ha sevel ur gevredigezh nevez yac'h). Kentel Walarn eo e tleer klask an abeg eus pep tra er spered; hag e gwir er spered e kaver bepred an abeg; mar divro an dud eo peogwir n'o deus mui abeg ebet da stourm e Breizh. Soñjal a reont e vint kenkoulz-all e Bro-C'hall pe forzh pelec'h. Breizh evito n'he deus mui ster ebet. Merzomp e kemer an emsaverion a zo e Paris an hent kontrol war ar gartenn : d'o fal e lakaont distreiñ da Vreizh, pa ne soñj an dud dizeriet a zo e Breizh nemet e kuitaat ar vro.

Eus Gwalarn eta eo disoc'het mennoz an dispac'h. Evel just pa lenner Gwalarn ne gaver ket se skrivet ent-hir, ent-sklaer. Roparz HEMON moarvat en derou ne ouie ket ivez betek pelec'h ez afe an embregerezh ma kroge gantañ. E bal kentañ oa diazezañ al lennegezh vrezhon. Lakaat a reer da wirionez ne c'haller ket krouiñ ul lennegezh diwar netra; e vez pep lennegezh krouet gant ur gevredigezh o vont war-raok. Ur burzhud eo neuze m'he

(*B)

deus Gwalarn krouet ul lennegezh hag ul lennegezh wirion a dalvoudegezh hollvedel, ha m'eo deuet war he lerc'h hepken ar gevredigezh o klotañ gant al lennegezh-se, ganet evit gwir ganti : emañ o tiwanañ bremañ. Un darvoud souezhus eo : Roparz HEMON zo bet war un dro diouganer ha krouer. Krouet en deus ur gevredigezh dre al lennegezh en deus prientet eviti; bremañ emañ hor gwrizioù el lennegezh-se.

Ur gevredigezh emsavel zo o tiwanañ e Breizh. Gwan eo c'hoazh e-keñver an nerzh niverel, - met tamm ha tamm e kresk, e kemer lec'h war an dachenn gevredigezhel e Breizh, betek ma c'hoarvezo ar pezh na c'haller ket tremen e-biou dezhañ : e vo stourm etre ar gevredigezh nevez-se a c'houlennno al lec'h hag ar gevredigezh kozh, da lavarout eo ar gevredigezh enframmet gant ar Stad C'hall e Breizh, - neuze ar mare-se a vo mare an distruj, mare an diazezañ da vat. Setu perak adalek bremañ e rankomp spurmantañ ouzh ar stourm war gement tachenn a zo er vuhez, adalek an dachenn gevredigezhel, an dachenn armerzhel, an dachenn soudardel. Ar pezh a c'haller lakaat dindan ur skritell hepken : ar stourm politikel; ar stourm politikel zo war un dro sevenadurel, armerzhel, kevredigezhel hag ivez soudardel, - ar brezel n'eo nemet un tu eus ar politikerezh.

Gwelout a rit aze an dro eus ar gudenn ha penaos gwriziennañ. Ar gwrizioù hon eus zo en Emsav e-unan. N'eus gwrizioù all da gaout e Breizh. Ha m'hon eus gwrizioù-ni ez eo peogwir hon eus gwrizioù da reiñ d'an dud e Breizh. Bloavezhioù 'zo e klever tud o lavarout "mont d'ar bobl". Mont d'ar bobl e gwirionez zo degas d'ar bobl an Emsav, ha degas ar bobl d'an Emsav, da lavarout eo reiñ gwrizioù d'ar bobl ha n'eo ket klask gwrizioù enni, - rak ar bobl zo diwriziennet. N'eus nemet komz gant tud ar vro e pep lec'h e Breizh hag e weler n'eus mui netra diouto, n'int ket Brezhoned peogwir eo bet distrujet o broadelezh, ha n'int ket Gallaoued ivez, rak Bro-C'hall zo ur vro, bet stummet a-hed ar c'hantvedoù, ha n'o deus bet perzh ebet, nag int nag o hendadoù, er stummidigezh-se. N'int na Breizh na Gall, n'int netra. Ni hon eus d'ober Breizhiz anezho, da lavarout eo tud wriziennet, ha ne c'hellont gwriziennañ nemet en Emsav.

*1-AB Mar'd eo ar pal da dizhout advrezhonekaat ar vro, penaos e welit kudenn ar rannyezhoù ha kudenn ar gwenedeg pergen ? Nac'h ez eus ur gudenn, pe diskoulmañ anezhi ?

*K-1 Ne gredan ket ez eus ur gudenn eus ar rannyezhoù. Da gentañ en holl vroioù ez eus rannyezhoù; lakaomp e Bro-C'hall : mar'd eus 70 teodyezh e Breizh, ez eus 700 e Bro-C'hall. Ne'm eus ket klevet morse e ve bet ur gudenn eno. Perak e ve ur gudenn e Breizh neuze ? Kemeromp ur skouer resis : en hanternoz Bro-

(*K-1)

C'hall e oa teodyezhoù henvoazel. Ur rannyezh e oa ivez; met nepred ne'm eus klevet an dud o venegiñ ar gudenn-se. Ha koulskoude ar rannyezh er vro-se a oa disheñvel-tre diouzh ar galleg lennegel; tud desket a oa war ar rannyezh-se, ha ne gav ket din e roent pouez d'ar gudenn.

An dud a gemer ar yezh peogwir ez eo ur benveg kevredigezhel evit ar gevredigezh vroadel a-bezh. Mar bez kelennet ar yezh e vo kelennet ur yezh hepken. Ha zoken emichañs c'hwi hoc'h-unan hoc'h eus klevet alies ar vrezhonegerion a zo a-enep d'o yezh o lavarout atav deoc'h : n'eus ket tu da gelenn ar brezhoneg peogwir n'eo ket ur yezh unvan. Pa'm eus kroget da zeskiñ brezhoneg, atav ez eus bet lavaret din : ar brezhoneg n'eo ket ur yezh peogwir eus ur barrez d'eben e kemm. An doare da respont hepken eo lavarout : n'eus nemet ur yezh; n'eus ket rannyezhoù. Evit pep yezh ez eo heñvel.

*2-A Savet en deus S.A.D.E.D. ur framm brezhon war dachenn an deskadurezh e-kichen ar framm gall. Daoust hag-eñ e vefe tu d'ober an hevelep tra war dachenoù all ?

*A-2 Pal an dispac'h eo brezhonekaat ar gevredigezh en he fezh. Dibabet ez eus bet sevel ur framm brezhon evit an deskadurezh moarvat peogwir e oa an tu aesañ da gejañ ouzh ar gudenn, hag an tu pleustrekañ ivez. Evit brezhonekaat ar vro eo ret da gentañ kaout tud barrek da zeskiñ brezhoneg d'ar re all. Ha S.A.D.E.D. zo er penn kentañ ur skol evit deskiñ d'an dud doareoù ar brezhoneg arnevez, doareoù ar brezhoneg azasaet ouzh ar vuhez a-vremañ. N'eo nemet ur bazenn evel just, hag ar pazennoù all, pe gentoc'h ar bazenn all zo ar bazenn bolitikel. Goude pazenn an deskadurezh e tizher pazenn ar politikerezh, hag adalek ar mare-se, adalek ar mare ma vo ur framm politikel brezhonek, hor bo un ardivink evit brezhonekaat ar vro penn-da-benn.

*3-A Perak ne vez kemeret nemet studierion evit o stummañ ha n'eo ket ivez micherourion hag a vefe barrekoc'h ur wech stummet evit tizhout ar bobl ?

*A-3 An tachennoù a vez pleustret bremañ zo tachennoù a denn d'ar studi dre vras. Aze ez eus unan eus an abegoù evit displegañ perak ez eus muioc'h a studierion a zeu d'an Emsav er mare-mañ eget a vicherourion pe a dud all ha n'int ket studierion. Lav-aromp koulskoude ez eus ivez micherourion hag implijidi a zeu bremañ da zeskiñ brezhoneg. Seurt stad a dracù ne deu ket dre un dibab tidel eus hor perzh. Met dre ret gant ar pezh a zo

(*A-3)

d'ober bremañ en Emsav ez eo reizh ma teufe muioc'h a studierion eget a dud all. Rak nebeutoc'h a boan o devez ar studierion da ober al labour goulennet bremañ. Un afer a vruderezh eo ivez. Ma n'eus ket kalz micherourion en Emsav ez eo peogwir n'eo ket aes bremañ ober bruderezh evit tizhout anezho. Nemet e ve divizet ober bruderezh a-zevri en o zouez; met ne gredomp ket eo deuet ar mare evit c'hoazh.

*4-B An Emsav a seblant nac'h Europa. Perak ?

*K-4 A-rack lavarout e nac'h an Emsav Europa, e vefe ret gouzout petra eo Europa, peseurt Europa a zo. E gwirionez evit ar poent n'eus Europa ebet. Klask a reer sevel un Europa, hini ar C'hwec'h, hag Europa ar C'hwec'h e gwirionez zo un danvez dreist-holl d'an impalaerouriezh c'hall. Tamm-ha-tamm evel just e vo stummet un Europa. Evit ar poent, pezh a c'haller merzout eo hepken ez eus riezoù en Europa, dreist-holl ar riez c'hall, a glask tennañ o mad eus un uhelvennad a zo kozh a-walc'h, evit diazezañ o beli war an darn gornok eus Europa. Bep an amzer e klever komz eus Europa adal an Oural betek an Atlantel. E gwir, kement-se n'eo nemet anvioù. Daoust e gwirionez an Emsav a nac'h Europa ? An Emsav ne c'hell ket nac'h Europa; evel m'emañ ez eo re vihan, re zic'halloud evit kaout ul levezon bennak. Ha zoken pa vo Breizh dieub ne gav ket din e c'hall diouti hec'h-unan kaout ul levezon war-eeun war donkadur Europa. Pezh a c'hell ober hepken eo diskar, pe harpañ da ziskar an impalaerouriezh e Kornog ar c'hevandir-mañ, ha dre-se tamm-ha-tamm heñchañ Europiz all war-du un Europa wirion. Evit ar poent, an Europa ez eus anv anezhi zo e gwirionez ur stumm a impalaerouriezh ha netra ken, implijet dreist-holl gant ar riez c'hall peogwir eo hi he deus an arme c'halloudusañ en Europa er maremañ; dre-se, Breizh n'he deus ket d'ober war-dro an Europa-se.

Pezh a c'hell ober eo distrujañ mennad an impalaerouriezh c'hall, neuze dre-se disteraat ar c'hevezerezh etre riezoù Europa a zo o klask kemer ar galloud; hag evel-se degas en o lec'h pobloù n'o devo netra da welout gant ar "pobloù" kozh, pezh a anver a-wechoù Europa ar Pobloù en un doare diresis. An Europa-se a vo savet n'ouzon peur, n'ouzon penaos; ne c'hell ket bezañ savet diwar ar riezoù a zo o ren bremañ met diwar dispennadur ar riezoù-se, diwar dispennadur an impalaeriezhoù a zo o ren bremañ en Europa.

Pal an Emsav o klask sevel ur Stad Vrezhon eo dres diskar an impalaeriezhoù hag aotren d'ar pobloù all, ar pobloù bihan dreist-holl en em unanif en ur gevredigezh evit sevel un Europa unvan; met an dra-se n'eo ket ur gefridi evit ar poent. Ne c'hellomp ober netra war dachenn Europa, bez' e c'hellomp kaout krog war bobl Vreizh tamm-ha-tamm met ne ve ket mat

(*K-4)

skignañ hon nêrzh e pep lec'h. Da gentañ sevel Breizh ha goude-se gwelout pa vo savet Breizh petra zo d'ober. Ret eo kregiñ gant ur bazenn eus an ober, goude ar bazenn-se e c'haller mont pelloc'h evit urzhiañ ar bed en-dro deomp.

Ret e vo evel just sevel un Europa evit mirout na zeufe dres Europa da vezañ un doare janglenn, ar pezh ez eo bet gwechall. Gwechall e voe tapet Breizh en Europa-se, distrujet evit aotren da Vro-C'hall trec'hiñ d'hec'h enebourion all; ar broioù impal-aerour kozh a oa o kevezañ etrezo, ha Breizh a oa ur skoilh evit Bro-C'hall; diskaret eo bet evit aesaat ar stourm lakaomp ouzh Bro-Saoz. Neuze ne c'hellomp ket lezel un Europa digenurzh en-dro deomp; ne c'hellomp ket bezañ diseblant ouzh uhelvennad Europa, met pezh a lavaren ne c'haller ket ober pep tra war un dro.

*5-B Lavaret hoc'h eus e oa paotred Breiz Atao rannvroelourion (aotonomisted). Da'm soñj e oant taeroc'h eget se; mont a raent pelloc'h, met d'ar mare-se e veze graet "aotonomisted" eus ar re daerañ. Bremañ e vefe graet anezho "broadelourion".

*B-5 Lavaret em eus e oa Breiz Atao kentañ, da lavarout eo Breiz Atao 1919, he doa ur gelennadurezh rannvroel. Da lavarout eo n'o devoa ket c'hoazh sellet Breizh evel ur vro e-kichen Bro-C'hall, hag er-maez eus Bro-C'hall. Aes eo da gompren, ken divoas e oa an dud c'hoazh. N'eo ket ur rebech a reomp dezho, n'eo nemet ur stadadur eus ar pezh e oant.

*K-5 Da lavarout eo, etre an daou vrezel, ar re a veze anvet "aotonomisted", zoken ar vroadelourion, a gomze alies eus broad Vreizh. Diaes eo gwelout an diforc'h, gouzout petra a soñjent. Aon o doa rak ar galloud gall, ha neuze ne oant ket gwirion. Breiz Atao a oa kalonekcc'h eget ar re all. Bez' e oa kalz re all, a oa war ur bazenn bolitikel dister a-walc'h ha na c'houlennent ket kalz hag a gomze hepken eus "autonomie morale", gerioù n'o doa ster ebet, met an holl evelkent a rae broadelourion anezho, pe a gomze eus broad Vreizh pe eus ar yezh vroadel, pezh na reer ket mui kalz bremañ.

*K An emsaver a ren e vuhez e brezhoneg.

Evit ar poent e vevomp en ur bed gall; da lavarout eo, kement a reomp zo lec'hiet er bed gall e-keñver micher, e-keñver buhez kevredigezhel; atav e vezomp en un aergelc'h gall, e-lec'h ma ne gomzer nemet galleg. Setu ez eus un dis-lavar etre hon buhez hag hon personelezh wirion. Ar stad-se ne c'hell ket padout hag an hini a soñje e c'hell mirout mennoziou breizhek ha bezañ brogarour hep ober netra war dachenn an dispac'h brezhon, hennezh ~~se~~ tonke ^{bragez} buan da koll e vennoziou. Ret eo d'ar brogarour brezhon klask lakaat da glotañ e vennoziou hag e vuhez personel. Penaos e c'haller henn ober ? E gwir ne c'haller henn ober nemet dre hanterouriezh ar gevredigezh vrezhon nevez a zo o sevel.

Tachenn gentañ ar gevredigezh-se eo an tiegezh. An tiegezh zo un unvez kevredigezhel; sevel a c'hell bugale e brezhoneg ha reiñ dezho un deskadurezh e brezhoneg; kement-se zo ul labour kevredigezhel. Bez' ez eus evelkent ul labour kevredigezhel kalz ledanoc'h, hini ar gevredigezh dre vras, da lavarout eo hini ar Stad. Evit ar poent n'hon eus Stad ebet; pezh a glaskomp ober dres eo sevel unan; ne c'hellomp he diazezañ en un taol ha ne vo diazezet ar Stad Vrezhon da heul un taol-dispac'h evel ur "révolution de palais", pezh a soñj darn; met tamm-ha-tamm o sevel da gentañ ar frammoù a zo ret, hag ar frammoù-se a rank bezañ brezhonek. Setu perak ez eo dre an Emsav hepken e c'hell an den ren ur vuhez kevredigezhel vrezhonek.

Ur vuhez kevredigezhel vrezhon a c'haller ren ivez dre vezañ skrivagner. Gant un den e-unan e vez kaset peurvuiañ al labour sevel oberennoù a lennegezh, nemet e ranker merkañ : daoust ma'z eo al labour-se ul labour hiniennel, e tenn e dalvoudegezh d'ar gevredigezh evelkent. Tennañ a ra forzh penaos da stummañ ur gevredigezh nevez.

Hogen n'eo ket hepken en doare-se e c'hell an emsaver ren e vuhez e brezhoneg, met dre gemer perzh e labour an Emsav, anez, penaos kemer an anv a emsaver ? ha n'eo ket forzh petore emsav; an Emsav urzhiet, an hini a gemero tamm-ha-tamm doare ar Stad. Labour an emsaver eo kemer perzh e savidigezh ar frammoù labour, e stummidigezh an emsaverion nevez, en aozidigezh frammoù ar Stad o-unan. Savet eo frammoù ar Stad deiz goude deiz gant ar re a gemer perzh en Emsav, en Emsav brezhonek a zo an Emsav nemetañ.

*5-K Tud a dalvoudegezh vras a zo, na vint morse gouest da zeskiñ trawalc'h a vrezhoneg evit bezañ gwir frammerion. Lezet e vint dizimplij eta ?

*K-5 N'ouzon ket petra a c'haller intent dre ar ger "a dalvoudegezh vras". Evel just ez eus tud a dalvoudegezh vras, me oar, met ar re na zeskint ket brezhoneg n'int ket Brezhoned. Neuze ne c'hellont ket bezañ talvoudus evidomp. An holl dud zo gouest da zeskiñ ar yezh pa fell dezho, - gant an doareoù kelenn a zo, ar re na zeskint ket brezhoneg eo ar re na fell ket dezho deskiñ, ar re o deus dispriz ouzh ar yezh e gwirionez. A-wechoù, bep an amzer e klevan komz eus hemañ-eñ a zo oc'h ober war-dro an emsav armerzhelour e Breizh, hag e seller outañ evel un den a dalvoudegezh vras, - a c'hell bezañ un den a dalvoudegezh vras e gwirionez, nemet an den-se ma ne zesk ket brezhoneg a ziskouez dre-se end-eeun ivez ne ra ket forzh eus Breizh. Neuze petra a c'haller tennañ dioutañ evit Breizh ? Tra ebet. Evit petra ez eo graet K.E.A.V. neuze, ha Skol Ober ha S.A.D.E.D. ?

An dud a dalvoudegezh a gomzer anezho zo tud a dalvoudegezh er framm gall. Deomp-ni n'o deus ket a dalvoudegezh. Bez' ez eus tud a dalvoudegezh e pep lec'h. Er framm brezhon n'o deus talvoudegezh ebet peogwir e chomont Gallaoued. E Breizh ez anavezomp tud a garfemp dedennañ d'an Emsav, met ma ne zeuont ket d'ar brezhoneg, daoust hag-eñ e vint talvoudus ? Da nebeutañ ne c'hallint ket bezañ implijet war-eeun er Stad Vrezhon. E c'hallint bezañ aze evel harperion, met n'o devo ket perzh gwirion er vro, e buhez ar vro. Setu ar gudenn. Estrenion e chomint forzh penaos. Soñjal a ran a-wechoù en Ao. PHILIPPONEAU, a zo gall, a zo un den mat, en deus graet kalz evit dihuniñ an emskiant armerzhel e Breizh, ar pezh a zo talvoudus forzh penaos. Met lakaomp e ve savet ar Stad Vrezhon hag eñ o chom bepred gant e c'hallig hep ma c'hallfe kemer perzh en ur maodiernezh bennak e Roazhon, - ne c'hallfe ket e gwirionez bezañ sellet evel ur Brezhon ma n'en defe ket desket brezhoneg. N'eus netra d'ober, daoust ma'z eo un den a dalvoudegezh vras evel ma soñjit, hag evel ma soñjan.

*B-5 An Emsav a laka an dud da zibab etre Breizh ha Bro-C'hall, - n'eus mui netra etre an daou. Neuze, ar re a zibab Breizh a zle gwiriziennañ en Emsav, da lavarout eo da gentañ adframmañ o buhez a-bezh dre ar brezhoneg. N'eo ket hepken deskiñ brezhoneg a zo d'ober, - distrujañ ar bersonelezh kozh ha sevel ur bersonelezh nevez. An dispac'h a grog er par hiniennel.

*6-K Daoust hag-eñ e c'hellomp sellout ouzh S.A.D.E.D. evel pazenn gentañ ur Stad ?

*B-6 Meur a wech en deus S.A.D.E.D. embannet en em selle e-unan evel pazenn gentañ n'eo ket ur, met ar Stad, hag ar re a labour e-barzh a labour gant ar mennoz-se. A-hend-all ne labourfent ket, sur. Rak poanius-bras eo evit an holl bezañ e S.A.D.E.D.,

(*B-6)

ken kelennerion, ken kefridiaded, ken skolidi. Ma n'o dije ket ur pal a dalvoudegezh hag ur pal hollek dirazo, sur ne rojent ket kemend-all a amzer, kemend-all a boan d'ar pezh a reont.

*7-K Penaos derc'hel en Emsav bugale an emsaverion desavet e brezhoneg ha mirout outo a guitaat ar framm brezhon evit ar framm gall ? Petra e rank bezañ roll ar skrivagner brezhonek en emgav a-vremañ ?

*K-7 Respont d'ar goulenn kentañ. Lakaomp da gentañ an dra-mañ : ar vugale zo dieub evelomp, dezho da zibab; neuze ne glaskomp ket derc'hel anezho : emaint aze, setu holl. Derc'hel a raint d'ar pezh hon eus roet dezho pe e nac'hint, met dezho da zibab da gentañ. D'an eil, merzomp an dra-mañ : emaint er framm a savomp, ha peurvuiañ un den a zo en ur framm n'en deus ket c'hoant d'e guitaat, peogwir ez eo atav diaes hag e rank kaout abegoù, abegoù sklaer, abegoù resis evit e guitaat. Lakaomp ar re ac'hanomp o deus kuitaet ar framm gall, o deus henn graet peogwir n'en em santent ket en o lec'h reizh er framm-se; ar framm-se ne glote ket gant o fersonelezh; un dislavar a oa etre ar sevenadur gall e oant sanket ennañ, hag o istor personel, stag ouzh un istor a oa ar sevenadur-se estren dezhañ. Ha setu pezh en deus hon lakaet da glask ur framm nevez a zo bet ar framm brezhon. An diskloterezh-se avat n'eus ket anezhañ evit bugale an tiegezhioù brezhonek, peogwir e kenglot pep tra enno. Evel just e c'hellont dre leziregezh dilezel ar framm brezhon, dre laoskentez, met n'eo ket evit abegoù poellek, evel m'hon eus graet.

Dre vras ez 'eo da bep hini dibab, pep hini en deus e frankiz, pep hini en deus ivez e rezid da ziorren. Evito e vo anat evelkent penaos e klot ar framm emaint gant o fersonelezh.

Respont d'an eil goulenn. Roll ar skrivagner brezhonek zo komz en anv ar gevredigezh vrezhon eus warc'hoazh. Komz en anv ar vroad a zo da vezañ diorreet. Ne c'hell tamm ebet bevañ en e dour-olifant, evel ma ra lod, pe evel ma lavaront e reont, daoust ma n'eo ket gwir evel just, - ma ne zarempredont ket an Emsav ez eo peogwir e spir dezho an darempredoù o deus e-maez an Emsav. Pep hini, kaer en devo ober, a vo atav frammet en ur Stad, en ur gevredigezh bennak. Hag ar re a soñj dezho e c'hellont bezañ er c'houmoul e gwirionez zo war an douar ha war un douar resis. Setu, mar'd emamp e Breizh, emamp en Emsav. Kement a skrivomp, kaer zo ober, a vo atav lec'hiet e Breizh, lec'hiet en Emsav. Roparz HEMON en deus merket an dra-se daoust ma felle dezhañ ma vefe personel oberenn ar skrivagner, a lavare : n'eus forzh petra a skrivo ar skrivagner a vo brezhon dre ma'z eo brezhon ar skrivagner. Da lavarout eo, emañ frammet

(*K-7)

en a-raok er gevredigezh vrezhon; neuze, kaer a vo ober, ne c'halla ket en em dennañ diouzh ar framm-se. E gwirionez en deus ar skrivagner ur c'halvedigezh hiniennel, met e roll zo atav kevredigezhel.

*8-K Petore abegoù a laka bugale an emsaverion da chom en Emsav pe d'e guitaat ?

*B-8 War dachenn an divezouriezh en deus K lakaet ar gudenn; me gav din ivez eo war an dachenn-se emañ ar gudenn. An Emsav zo an hent reizh nemetañ e Breizh. Mar bez desavet ar vugale en un doare reizh e tibabint an hent reizh, hag e chomint en Emsav. Ar c'hraf nemetañ eo se, da'm meno. An doare eo ivez da veizañ an diflipadurioù a welomp en-dro deomp.

Tud zo en Emsav o vevañ gant un doare morc'hed, o kaout aon da skouer da ziskouez an Emsav evit ar pezh ez eo d'o bugale; tud o deus aon rak heuliadoù an Emsav, ha neuze a sav o bugale evel pa na vije ket a Emsav. Pe c'hoazh e tiskouezont an Emsav evel ur pleustradur er-maez eus an urzh o ren, mui pe vui evel un dra direizh; neuze, morc'hedet eo ar vugale hag a-benn ar fin e tibabont an hent reizh a zo evito ar framm gall, an urzh c'hall, ar re nemeto int bet lakaet da anaout. Tud zo ivez a sav fall o bugale : ne reont ket a-walc'h war o zro evit o gwriziennañ en Emsav, hag o lezel a reont da ziflipout dre m' o deus an treuzgeot gall mouget ar gwrizioù emsavel.

An dud a zo o prientiñ ar Stad Vrezhon, p'o deus bugale, o sav e brezhoneg. Tud all avat a sav o bugale e brezhoneg oc'h en em zerc'hel er-maez eus pep preder politikel : un doare idolenn eo evito ar brezhoneg, hep netra en tu all. Ar vugale, perak e vent droch ? a zilez buan ar brezhoneg na gas da netra. Perak strobellañ ar vuhez gant an hentoù na gasont da nep lec'h ? Evit ma talc'ho ar vugale da bleustriñ ar brezhoneg e rank ar brezhoneg kas d'un dra bennak a dalvezó ar boan da engouestlañ ar vuhez ennañ, e rank reiñ digor war ur vuhez a dalvezo ar boan da vezañ renet.

Ne c'haller ket ober goap nag eus an Emsav nag eus ar vugale; reiñ dezho un hent faos, un hent bac'h, un hent o lakaio er-maez eus pep kevredigezh zo ober goap eus ar vugale; diskouez dezho an Emsav evel un dra er-maez eus an urzh, eus ar Stad, evel ur blijadur difennet, zo ivez ober goap eus an Emsav.

Evit mad ar vugale eo e tesaver anezho, n'eo ket evit mad ur sorc'henn ha pa ve ar sorc'henn-se ar brezhoneg, - ar brezhoneg hep Stad Vrezhon da sevel evit reiñ talvoudegezh kevredigezhel dezhañ.

*9-K Ar C'hallaoued n'int ket prest da reiñ da Vreizh he frankiz. Ul lezenn zo abaoe Daladier, a zifenn n'eus forzh petore bruderezh a zo he fal distagañ un tamm eus tiriegezh Frañs. Difennet eo komz eus ar Stad Vrezhon. Penaos e vo graet bruderezh en Emsav politikel da zont ?

*B-9 Aze dija emamp war dachenn an ober pleustrek e-touez ar boblañs. Un niver traoù zo a-enep d'al lezenn c'hall; neuze, emañ ar C'hallaoued kemeret etre daou vennad : mar lezont an dispac'herion da genderc'hel gant ar pezh a reont e teuio ar re-mañ kreñvoc'h ha dañjerusoc'h evit ar Stad C'hall; mar tagont an dispac'herion e vo diouzhtu muioc'h a vruderezh, ha forzh petra a raint a roio nerzh d'an dispac'h. D'an dispac'herion da c'houzout c'hoari en afer. Reiñ a c'haller istor ar "Bzh" evel ur skouer vihan eus an degouezhioù-se. Da gentañ o deus ar C'hallaoued tavet war ar "Bzh"; p'o deus gwelet e rae berzh, o deus laosket o frefeded outi; dre un taol droukchañs ez eus bet ur penn fall a varner evit dizarbenn kemennadenn ar brefeded; ar wech-se eo deuet ar "Bzh" da vezañ un arm a vruderezh politikel, goveliet gant ar C'hallaoued o-unan (rak, en derou, ne oa nemet un embregadenn genwerzhel ha touristel), ha ledet ganto (da heul embann-berzañ ar maodiern, ez eus bet trouz en holl gelaouennoù gall hag er Stlenn a-berzh Stad zoken). Diouzh un daelerezh ez a ar stourm; an daelerezh avat, ur wech lusket, a rank kenderc'hel : mar chom a-sav ur prantadig, emañ an dispac'h en arvar da goll kement en deus gounezet drezañ.

*K-9 Ur gudenn a gempouez eo se. En Iwerzhon e oa iskis a-walc'h. D'ur mare 'zo e oa gouest Iwerzhoniz da zibunañ e kêr gant armoù ha pep tra; hag ar pennadurezhioù saoz ne gredent ket ober netra; perak ? Peogwir o devoa aon da lakaat an traoù da darzhañ muioc'h. E Breizh emañ heñvel; lakaomp e krogfent da heskinañ, en o defe aon na deufe an Emsav kuzh kalz taeroc'h. Diouzh an tu all, mar tagont tud e vo graet bruderezh evel ma'z eus bet graet goude ar brezel diwezhañ, ar pezh en deus hegaset anezho a-walc'h evel ma ouzoc'h ha d'ar c'houlz-se evel just emaint etre an daou, oc'h en em c'houlenn petra ober, - goude ar brezelo doa bet lakaet Kembreiz da zont evit diskouez n'o doa graet droug ebet d'ar Vrezhoned, met an dra-se oa un afer spontus evito. Aze e vo tu da c'hoari evel just deiz pe zeiz.

*A Petra eo al labour emsavel bremañ ?

Al labour emsavel zo da dermenañ evel ar pezh a zo empleget gant palioù an Emsav.

Gwelet hon eus e oa ret d'al labour emsavel bezañ renet e brezhoneg ha d'al labour emsavel bezañ framm. Bremañ ez eus tu d'en em c'houlenn : met penaos en em gemer evit ren ul labour evel-se e brezhoneg hag ivez penaos en em gemer evit frammañ an Emsav. En un doare e vevomp en devezhioù-mañ e-barzh ur framm emsavel; ar frammoù emsavel a zle bezañ azasaet ouzh ezhommoù an Emsav. Hag ezhommoù an Emsav er mare-mañ zo stummañ tud, stummañ dispac'herion; setu perak ez eo ret en em zibab evit sevel kreizennoù-stummañ e pep lec'h e Breizh.

Gwelet hon eus ivez e krog stummadur an emsaver gant ar brezhoneg da gentañ. Kentañ tra a zle bezañ diazezet, hag aze emañ pazenn gentañ stummadur pep emsaver, eo an aozadurioù evit deskiñ brezhoneg d'an dud. Aze ez eus ul labour fetis a c'hell bezañ graet gant ur bern tud e Breizh. Er bloavezhioù tremenet ez eus bet graet taolioù arnod un tamm e pep lec'h evit dizoleiñ pe evit amprouiñ an doareoù efedusañ da stummañ an dud, da nebeutañ evit deskiñ brezhoneg d'an dud. Bremañ ez eo anavezet ha diazezet mat an doareoù-se. N'eus kudenn ebet ken war an doare da zeskiñ brezhoneg d'an dud, pe n'eus hogos kudenn ebet ken. Gwelet hon eus dre forzh pleustriñ e c'hell un den deskiñ komz brezhoneg en ur bloaz, hag a-benn daou vloaz lenn kement tra a vez embannet e brezhoneg, - gant ur geriadur marteze, met lenn evelkent pep tra. Kement-se a ziskouez e c'haller er mare-mañ degemer tud nevez hag o enframmañ buan en Emsav; o enframmañ da gentañ dre zeskiñ dezho benveg kevredigezhel, sevenadurel ha benveg labour an Emsav, ar brezhoneg, ha goude-se dre o lakaat da gemer perzh el labour framm.

Piv a zeu d'an Emsav ? N'eo ket n'eus forzh piv. Ne c'hellomp ket mont war ar straed ha kejañ ouzh kement paotr pe blac'h a dremen evit o fediñ da gemer perzh en Emsav. Daou abeg 'zo evit na ober en doare-se; an hini kentañ eo ne c'hell dont d'an Emsav er mare-mañ nemet an dud o deus ur gizidigezh arbennik ouzh kudennoù Breizh; an eil abeg eo en deus an Emsav er mare-mañ ezhomm eus ur seurt tud arbennik ivez, ar re a zo gouest da gemer perzh e labour ar c'hreizennoù-stummañ. Kemer a reomp da lakadenn-loc'hañ e kaver ar seurt tud arbennik-se e-touez ar re end-eeun a ziskouez ur gizidigezh arbennik ouzh kudennoù Breizh er mare-mañ. Bihan e rank chom ivez bremañ niver an dud o tont d'an Emsav o vezañ ma ne c'hell ket ar c'hreizennoù-stummañ en arc'hwel plediñ gant un niver bras a zanvez emsaverion. Un dra nevez zo o tiwanañ aze, peogwir e tenn d'ar politikerezh, - ha koulz divoulc'h eo an dachenn-se en hor bro. Evel just ez eus e Breizh kevredigezhioù pe strolladoù a lavar int politikel hag a ra ul labour o tennañ d'ar politikerezh, pe da nebeutañ d'an

(*A)

armerzh pe d'ar gevredigezh. Met ar fazi a reont eo diazezañ o labour er-maez eus an Emsav hag er-maez eus ar brezhoneg, setu persak ne zeuont ket a-benn d'ober kalz traoù. Pa grogomp gant al labour politikel bremañ, hon eus da ergerzhout ha da ziazezañ an holl gevrannoù eus ar politikerezh, ar gevredigezh, an armerzh evel studi hag evel ober. Boulc'het e c'hell bezañ al labour-se bremañ a drugarez d'an emsaverion a zo bet stummet endeo er c'hreizenoù-stummañ kentañ.

Al labour stummañ ur wech diazezet a zle mont en-dro koulz lavaret dioutañ e-unan : ur wech divizet mat an hent da gemer evit stummañ an emsaverion, evit deskiñ dezho brezhoneg, evit deskiñ dezho istor an emsav, evit deskiñ dezho ren un obererezh emsavel, e vo skoueriekaet ar c'halvezerezh-stummañ ha ledet d'ar vro a-bezh. Ne vo ket pledet ken da ijinañ hentoù nevez ha kalvezderioù nevez. Da lakadenn ivez e kemeromp e rank an Emsav mont buan, hag ur wech diazezet ur pennad-hent ez a an diazezerion pelloc'h da astenn an hent war-du ar palioù merket, hep koll amzer. Savet e tle bezañ an Emsav evel un aozadur liesek hag emgefreak meur a gevran anezhañ.

*9-A Pe emzalc'h a gemero ar Strollad da zont e-keñver peurrest an "Emsav" breizhat dre ar munud ?

*B-9 Etre krochedoù en deus ar goulenner lakaet ar ger "Emsav", ar pezh a zo dija meizañ ar paour kaezh "Emsav"-se evel paket en ur glorenn. Hag e gwir ez eo an "Emsav"-se da dermenañ. Mar komprenan mat ar goulenn ez eo al luskadoù a anavezomp bremañ o tifreñ e Breizh a gleiz hag a zehou abaoe dekvloaziadoù, ha n'int ket gwriziennet en Emsav, lakaomp da skouer ar MOB, aspadenn ar rannvroelourion c'hallek eus ar rakvrezel, lakaomp an UDB a zo un astaol eus ar MOB, levezonet gant strolladoù politikel estren hag a chom diefedus ken e-keñver Bro-C'hall ken e-keñver Breizh o vezañ ma ne wrizienn ket en Emsav, betek-henn da vihanañ. Petraa c'hell ober an Emsav, anez tennañ an dud a dalvoudegezh a zo aet e-barzh al luskadoù hep gwrizienn na dazont hag a zo o koll o amzer e-barzh, - astenn an dorn dezho. O vezañ ma vo an Emsav politikel diazezet un dra hollel ha klok e kavo pep hini e blas ennañ hag an doare da ren al labour efedusañ evit mad ar vro hag e vad dezhañ e-unan. Er mare-se ne gav ket din e c'hallimp lakaat ar skritell "Emsav" war ar pezh a vo er-maez eus an Emsav e gwirionez. Ur wech diazezet kement skourr obererezh a zo ret evit ren an emgann da sevel ar Stad, ne vo mui digarez ebet da chom er-maez. Tud o deus nevez'zo klasket klenkañ an Emsav er reizhiad klasel dehou-kleiz; ur beiadur eo : mar en deus an Emsav d'ober gant ar reizhiad-se, ez eo ar reizhiad-se a rank bezañ klenket e-barzh an Emsav ha n'eo ket d'an Emsav bezañ klenket enni.

(*B-9)

X
gwerin
gwerin

N'eo na difennet na diboell diawelout e kenstrivo e diabarzh framm an dispac'h luskadoù a vo skritellet "kazel gleiz" ha "kazel dehou". Emsaver ebet ne c'hell nac'h ouzh tud an UDB a welout ar Stad Vrezhon e stumm ur weriniezh giz yougoslaviat pe sinaat; tud an UDB avat n'o deus gwir ebet d'ober emsaverion anezho ma nac'hont gwriziennañ en Emsav istorek ha kemerout e bal nesañ a zo sevel ar Stad Vrezhon. N'eo ket krennañ war frankiz an dud e fell d'an Emsav ober, met gant o frankiz endeeun, ha gant unded ar vro, ez eus ampleget dibaboù-diazez na c'hell hini ebet ac'hanomp tremen e-biou dezho.

Ur ger hepken evit klozañ : labourat. Labourat zo d'ober evit perc'hennañ ar brezhoneg, labourat zo d'ober evit distrujañ ar vuhez kozh ha krouiñ ur vuhez nevez, labourat zo d'ober evit stummañ tud nevez, labourat zo d'ober dibaouez. Ha labourat en un doare speredek... Ur c'hi am eus, a vez staget, re alies, ha ramzel eo al labour a ra ar c'hi-se e penn e chadenn, oc'h ober kelc'hdroioù kant gwech bemdez; ramzel e labour, met n'eo ket emsavel. Tud e Breizh a ve techet da labourat evel ma labour va c'hi. Labour emsavel zo d'ober.

EIL KENDIVIZ : BUHEZ AN EMSAVER

**B

Komz a reer eus kelennadurezh ar Strollad Broadel da zont, komz a reer eus pal ar Strollad Broadel, eus urzhiadur ar Strollad Broadel; ret eo komz ivez eus an dud a vo er Strollad, pe evit ober gant ur ger resisoc'h, a zo en Emsav. Komz eus an dud a dle bezañ graet a-raok komz eus an traoù; un dra difetis eo ur Strollad politikel, un dra war ar paper a-raok bezañ un dra en ober. Ha pa vez un ober da seveniñ e ranker gouzout petore tud en seveno : diouzh talvoudegezh an dud e vez an ober. Amañ e stourmomp ouzh an difetisted a ren war ar speredoù. An dud eo a ra ar vro ha diouzh talvoudegezh an dud e vo ar vro.

An Emsav n'eo ket ur gostezenn o stourm ouzh kostezennoù all. Diouzh un tu emañ ar Stad C'hall o klask krouiñ Gallaoued e Breizh, diouzh an tu all ez eus dilerc'hioù eus pezh a voe Breizh gwechall : ur Vreizh o vont da get tamm-ha-tamm, ur Vreizh o vreinañ. An dud eus ar Vreizh-se o deus mezh peurliesañ outi ha klask a reont bezañ Gallaoued, an doare nemetañ a gavont da vezañ tud eus o amzer. Un trede tra a zo : an Emsav; pal an Emsav zo krouiñ ur gevredigezh nevez e Breizh hag e bal kentañ eo. Ur gevredigezh nevez, da lavarout eo tud nevez. Ar strolladoù, al luskadoù na gemeront ket ar pal-se zo tonket da c'hwitout, pa ne glaskont ket da gentañ kaout tud, pa ne welont ket ez eo an dud a zo da gentañ da grouiñ ha pa ne c'haller ket kemer tud diskaret evit sevel netra. Adsevel tud zo kejañ ouzh tud, tud a anavez er vuhez fetis ha labourat ganto d'o adsevel ha ganto da sevel tud all. Setu al labour a zo d'ober da gentañ e Breizh. Hag an dud a vo adsavet, ar re a vo stummet e gwirionez eo ar re a raio al labour.

E div lodenn e vo rannet hiziv an displegadennoù. Da gentañ e vo komzet eus an Emsav evel kevredigezh. Ha goude-se eus emzalc'h an Emsaver e kevredigezh an Emsav. Strizh e hañval bezañ an dachenn degemeret, met gwelet e vo e tizher dre an hent-se ar gudenn a-bezh, kudennoù hollek Breizh.

**K

An Emsav evel kevredigezh.

An den brezhon nevez evel just ne vez ket graet e-unan. Graet e vez dre an darempredoù kevredigezhel; da lavarout eo, ma ne vefe nemet ur brezhon e Breizh, ne vefe brezhon ebet. Ar brezhon nevez zo bet graet gant ar rummadoù tremenet ha tamm-ha-tamm; an hini en deus lennet levrioù savet gant ar vroadelourion a c'hell dont da gompren kudenn Vreizh, d'en em santout

(**K)

Breizhad, d'en em zougen ivez evel ur Brezhon. Hogen ne c'hell kas ar mennad-se da wir nemet o kavout darempredoù e diabarzh ur gevredigezh a zo en un doare skeudenn ar vro warc'hoazh. Ar vro a rank bezañ stummet e diabarzh an Emsav, da lavarout eo, tamm-ha-tamm e tle ar stourm, stourm ar gevredigezh warc'hoazh bezañ stummet e diabarzh an Emsav. Evel just ez eo ar gevredigezh-se da gentañ ur Stad peogwir ez eo ar Stad kenurzhiadur hag e diabarzh ar Stad-se e vez stummet ar brezhon e gwirionez. Da gentañ, darempredoù a zen da zen, met ivez darempredoù kempleshoc'h e diabarzh ar gevredigezh, peogwir n'eus ket a-walc'h eus ar bazenn brevez evit stummañ un den met rankout a ra kaout ur framm ledanoc'h. Setu perak e tle ar c'hreizenoù bihan a zo savet bremañ en em gevreañ etrezo evit dont a-benn da stummañ tamm-ha-tamm ur vroad. An dra-se a vo graet er bloavezhioù da zont.

(**6-K) Petore emzalc'h a zle an emsaver kaout dirak an darvoudoù a-vremañ, da skouer ar "Bzh" ?

(**K-6) Ne gav ket din ez eus aze un darvoud e gwirionez. Istor ar "Bzh" zo fentus a-walc'h, peogwir er penn kentañ ne oa nemet un arouez evel n'eus forzh pe hini. Graet eo bet gant kenwerzhourion. Graet ez eus bet bruderezh dezhañ dreist-holl war gelaouennoù gall evel Bretagne Magazine ha setu perak en deus graet kement a verzh. N'eo talvoudus istor ar "Bzh" nemet evit diskouez o deus ar C'hallaoued aon rak an Emsav. Anat eo o deus kemeret spont o welout ar berzh a rae an arouez-se ha setu perak o deus he berzet. Talvoudegezh ar "Bzh" eo diskouez hepken ez eo ar C'hallaoued kizidik-tre ouzh kudenn Vreizh.

Ar gwellañ bremañ eo ober bruderezh evit ar "Bzh", met arabat reiñ pouez d'un dra n'eo nemet un degouezh en istor an Emsav met n'eo ket bet aozet gant an Emsav. Talvort a ra d'ar bruderezh. Evit an emsaver en em gav un darvoud seurt-se war dachenn ar bruderezh dre vras ha netra ken.

(**B-6) Aze e sav kudenn ar bruderezh e gwirionez. Hag ar bruderezh ez eus daou du dezhañ :

- ober bruderezh ha tizhout tud;
- kaout un dra bennak da vrudañ.

Ur strollad politikel pa ra bruderezh a ra evit brudañ un ober bennak. En degouezh-mañ e c'haller en em c'houlenn petra en deus an Emsav da vrudañ. Daoust hag ur Strollad Broadel a zo da vrudañ ? An dud dihonet gant ar bruderezh, war-du petra e vint heñchet ? Petore labour a vo fiziet enno ? Petore tud a vo lakaet war o zro evit o stummañ ? Setu ar gudenn. D'hor meno er mare-mañ n'eo ket prest an Emsav da zegemerout ur bern tud evit o stummañ ha reiñ dezho ul labour kendalc'hel da seveniñ. Ur

(**B-6)

bern tud a zihuner, skrapet e vezont a-gleiz hag a-zehou gant ar MOB, gant Kendalc'h, gant luskadoù all hag e tisoc'h kement-se gant ur c'hwitadenn; rak n'eus den evit o stummañ, n'eus den evit fiziout enno ul labour da seveniñ hag ar pal : kemer ar galloud e Breizh, a zo lezet er-maez, o vezañ ma'n em gav den evit heñchañ war-du ar pal-se. Mat eo bepred afer ar "Bzh" peogwir e laka da vreinañ ar gevredigezh c'hall e Breizh. Met n'eus eno pal emsavel ebet evit ar mare. Evel an dud a laka bombez bremañ, pa grouont dizurzh e Breizh hag e lakaont ar C'hallaoued en un enkadenn. Met dañjerus eo ivez rak an Emsav n'en deus netra da ginnig er mare-mañ d'an dud a vo lakaet da zont dezhañ gant seurt darvoudoù ha neuze e vo amjestr al labour. Degemerout a c'haller an darvoudoù-se gant ur mini levezet met arabat eo bezañ touellet ganto. N'int ket bet, evel ma lavar K, prientet gant an Emsav; diwanañ a reont evel kebell-touseg hag ez eont da get ken buan ha kebell-touseg. Ne vezont ket enframmet en ur roll obererezh resis, n'int ket bet rakwelet ha ne weler ket petra kas d'o heul.

Kudenn ar bruderezh eo bepred. Ar bruderezh a rank kaout un dra bennak da vrudañ ha betek-henn ne c'haller ket lavarout ez eus kalz traoù fetis da vrudañ.

(**9-K) Un arvar bras zo o krouiñ ur gevredigezh evel-se. Breizhiz a c'hell sellout outi evel ur geto muioc'h eget evel ur skouer.

(**A-9) Ar gevredigezh a zo e Breizh bremañ n'eo ket ur gevredigezh wirion rak Breizhiz a vev enni evel laou e-barzh blev unan bennak, evel arvevaded. En un doare gouzañvat. Ha n'eus nemet an Emsav a c'hell lakaat Breizhiz da ren ur vuhez kevredigezhel wirion. Ne c'hell ket an Emsav bezañ ur geto evit daou abeg : da gentañ ez eo digor; er mare-mañ ne c'hell enframmañ nemet nebeut a dud bep bloaz, ha dre-se e kredfe un arseller diwar-c'horre ez eo kloz; e bal avat zo enframmañ an holl Vrezhoned, hag al labour kaset bremañ a denn end-eeun da herrekaat ar c'has ha digeriñ dorioù all; d'an eil ez eo an emsaver dre dermenadur un den prederiet gant buhez ar gevredigezh emañ o sevel, ha, da heul, gant buhez an dud a dle amparañ ar gevredigezh-se, da lavarout eo gant buhez pep den eus al ledenez-mañ. Met aze ^{ur} spisadur ~~zo~~ d'ober : n'en deus ket an emsaver da vezañ chalet gant dazont ar gevredigezh c'hall, - nemet gant he distrujidigezh ne lavaran ket, - peogwir ne ra Breizhiz nemet gouzañv anezhi, ha n'eus netra evito da seveniñ er gevredigezh c'hall.

N'eus nemet an Emsav a c'hell lakaat Breizhiz da seveniñ ur vuhez kevredigezhel hag ur vuhez wirion er mare-mañ. Mar bez komprenet an traoù en doare-se ne c'hell ket an Emsav, ar gevredigezh emsavel disoc'hañ war ur c'hwitadenn rak kinnig a ra an

(**A-9)

diskoulm da gudennoù ar bobl vrezhon, ha n'eus nemetañ ouzh henn ober.

Al labour bremañ eo tizhout an dud a c'hell bezañ tizhet er mare-mañ e Breizh hag a zo digor da enkadennoù ar vro ha barrek da gompren ar pezh a c'hoarvez. Ul labour a vruderezh zo e-barzh evel just, hag ur gudenn a lavar eo ar bruderezh : kavout an doare da zisplegañ a glot ouzh ezhommoù, ouzh enkadennoù pep hini eus ar renkadoù tud e Breizh. Anat eo ne vez komzet heñvel ouzh ur micherour hag ouzh ul labourer-douar. Ha koulskoude e vo lavaret an hevelep tra dezho.

Roll an Emsav eo respont da enkadennoù Breizh penn-da-benn, da enkadennoù holl renkadoù ar gevredigezh e Breizh.

(**10-K) Penaos reiñ d'ho meno da gompren da strolladoù 'zo, a zo o ren war an dachenn bolitikel e Breizh a-vremañ (MOB da skouer) ez int tonket da gouezhañ ma ne gemmont ket o fenngelennadurezh ?

(**B-10) Diaes eo lavarout emañ ar MOB o ren war an dachenn bolitikel e Breizh a-vremañ. Ar pezh a ren war an dachenn bolitikel bremañ eo ar Stad C'hall, da lavarout eo n'eo ket zoken ar strolladoù gall, met ar mererezh gall ha kement galloud-Stad gall a zo e Breizh. Ar MOB zo bet betek-henn ur strollad-brudañ. Bez' e c'haller e varn e meur a zoare, met ne c'haller e nep doare lavarout emañ ar MOB o ren war an dachenn bolitikel e Breizh.

Goulenn digant tud ar MOB kemmñ o fenngelennadurezh zo diaes ivez o vezañ ma ned eur ket sur o deus ur gelennadurezh politikel. Mennoziou difetis o deus war ur bern traoù, mennoziou hon eus gwelet o kemmñ dizehan abaoe an derou, - hag ar c'hemm-adennoù-se, pouezus eo henn merkañ, ne oant ket frouezh un ober na disoc'h an daelerezh berzhus a gaver da linenn-ster e kement labour-krouiñ a zo; ne voe anezho er c'hontrol heuliadoù hep ster d'an dizemglev, d'an termerezh, d'an hilgennerzh diavaez; goulenn diganto kemmñ a ve na mui na maes goulenn ur c'hemm nevez war-lerc'h kemmoù all, ha ne gav ket din e kemmo se kalz a dra e tonkadur ar vro. Menegiñ ar MOB zo lakaat ur skritell war ur goumoulenn. Gwelloc'h eo en em dreiñ war-du Breizhiz dre vras : an dud a zeu d'an Emsav er mare-mañ, - komz a ran eus an Emsav politikel brezhonek, - zo dre vras tud n'o doa ket bet afer ouzh ar MOB a-raok. Neuze ne hañval ket bezañ ampld oc'h en em dreiñ war-du ar MOB... Ouzhpenn-se, an dud a zo bet er MOB zo bet gwaret o gweladurezh, hag ur pennad adheñchañ zo d' ober ganto peurvuiañ, hep dont a-benn bepred eus an taol. Gwell-oc'h eo reiñ digor da dud o paouez dihuniñ d'an Emsav rak gant ar re-se eo an aesañ labourat.

****11-K** An emsaver dirak an dimeziñ (e-keñver yezh da skouer) ?

****K-11** Da gentañ e c'haller lavarout ez eo gwelloc'h evit an emsaver chom hep dimeziñ. Ret eo lavarout emañ en ur marevezh dispac'hel e Breizh. Neuze ar re a rank sammañ un atebegzh bennak a zle soñjal en dra-se. Mar dimez, e tle diwall mat, peogwir e rank e bried bezañ a-du gantañ war poent ar yezh da gentañ, hag ouzhpenn-se bezañ kendrec'het penn-da-benn diwar-benn talvoudegezh ar vroadelezh e Breizh hag an Emsav broadel.

C'hoarvezout a ra, alies zoken, e timez un emsaver er-maez eus an Emsav. Un tiegezh a vo savet a c'hallo bezañ un tiegezh brezhonek evel just met atav e chom kudennoù diaes, - peogwir ne roer an hevelep talvoudegezh d'ar yezh ha d'ar vroadelezh.

A-hend-all, ar re a gred e c'haller en amzer-vremañ sevel ur gellig kevredigezhel vrezhonek-rik en un tiegezh zo faziet. Tu a zo d'ober un dra bennak, met ne vo ket un dra klok ha marteze e vo kollet a-benn ar fin kalz amzer o sevel ur gellig kevredigezhel n'he deus ket a amzer da zont er framm gall. E framm ar Stad e tle bepred bezañ sellet kudenn an tiegezh, ha kudenn an tiegezh brezhonek, - evit ar poent eo arabat reiñ da hemañ un dalvoudegezh politikel, rak eus ar Stad Vrezhon hepken e teuo dezhañ. Da c'hortoz, n'en deus nemet un dalvoud-egezh arouezel.

Dre vras eta, an emsaverion, an dispac'herion, ar re hon eus ezhomm anezho a rafe gwelloc'h evel just chom dieub; nemet ne c'hellont ket atav ha d'ar mare-se eo gwelloc'h dezho dimeziñ en Emsav.

****B-11** An emsaver a zimez hag en deus bugale ne c'hell dimeziñ ha kaout bugale nemet er gevredigezh emañ o sevel; evitañ e-unan, evit e wreg hag e vugale e rank sevel un tiegezh brezhonek hag emsaver, - n'eo ket brezhonek hepken, anat eo. N'eus ket kalz da c'hortoz moarvat war-eeun digant ar c'helligoù kevredigezhel a seurt-se, met evit buhez hiniennel an dud ez int pouezus-bras. Un doare d'en em stummañ eo ha da stummañ bugale.

Un tu all zo d'ar gudenn ivez da'm meno. An dud e Breizh zo holl en un enkadenn. Klask a reont mougañ an enkadenn-se o tont da vezañ Gallaoued. Ne zeuont ket a-benn. Moarvat e teujent a-benn ma ne vije ket eus an Emsav; met an emsaver dres o vezañ ur Brezhon gwirion, o tilezel ar galleg, o tiazazañ pep tra war ar brezhoneg a ro ur ster d'an enkadenn m'emañ an dud e Breizh hag e tiskouez un hent d'an diskoulm, - e par an hinienn. Dre-se ez eo krisoc'h enkadenn an emsaver eget an hini m'emañ Breizhiz dre vras, rak o kenderc'hel evel m'emañ ez a war-du an emzistruj, - pe an dispac'h. O krouiñ e Breizh ur vuhez ha na c'hell klotañ e nep doare ouzh ar vuhez mennet gant ar Stad C'hall e kas an traoù war-du an dispac'h. Hag e

(**B-11)

vir ouzh an dud all e Breizh a gemer an hent mennet gant ar Stad C'hall. En doare-se ez eo an emsaver, an hini a sav un tiegezh brezhonek, ur skoilh war an hent a gemerfe an dud e Breizh war-du ar gallekaat; hag en un doare e redi an dud da zibab : pe heuliañ ar skouer a ro pe neuze mont war-du mennadurioù ar Stad C'hall. Nebeut-kaer a dud zo evit heuliañ e skouer, met an holl a rank degemerout an dra-mañ : reiñ a ra ur ster d'an enkadenn m'emaint.

****12-K** Arroueziusoc'h eo beaj-enklask dileuridi ar gouerion da vBrussel eget an emvodoù trouzus e Breizh. Ha kentel zo tu da dennañ diwar an darvoud-se ?

Emsav
****K-12** An dra-se a ziskouez hepken e krog ar gouerion da gompren kudenn Vreizh. Met daoust hag-eñ o deus komprenet evit-se e oa ret sevel ur Stad Vrezhon, n'ouzon ket. Ret e ve goulenn outo. Diskouez a ra e teu ar Vrezhoned da emouezañ ouzh kudennoù armerzhel ar vro met ne ziskouez ket c'hoazh o deus komprenet ar gudenn vroadel a zo e Breizh. An darvoud dioutañ e-unan n' en deus ster ebet, - nemet ar ster a ro dezhañ an Emsav.

****13-K** Ar MOB a servij d'un dra memestra. Da skouer kas tud d'an Emsav.

****A-13** Dre zegouezh e c'hell tud dont d'an Emsav dre ar MOB, ha c'hoarvezet eo. Met er mare-mañ dre vras, an dud a zo tremenet dre ar MOB n'int ket chomet e-barzh. Ha petra zo c'hoarvezet gant an dud-se ? Dre vras o deus pellaet diouzh an Emsav. Ar MOB enta n'en deus ket talvezet evit an darn vrasañ eus an dud a zo tremenet e-barzh d'o heñchañ war-du an Emsav. Dre zarvoud en deus kaset tud d'an Emsav, dre zarvoud hepken. Ha se dre an diouer a gelennadurezh emsavel.

****14-K** Daoust hag-eñ ez eo gwelloc'h d'an emsaver (ha d'e diegezh) bezañ o chom e Breizh, evit sevel un tiegezh brezhoneger ?

****B-14** Ret eo sellout e-keñver petra en em lakaer. Hag-eñ ez eo e-keñver ar pouez-mouezh, hag-eñ ez eo e-keñver an darempredoù gant an dud pe hag-eñ ez eo e-keñver ur pal politikel.

Evel just e-keñver ar pouez-mouezh, evit mad ar vugale en o yezh ez eo gwelloc'h dezho klevout brezhoneg en-dro dezho, ha, dre vras, brezhonegerion Kornog ar vro pa gejont ouzh bugale brezhonegerion a gomz outo en o yezh. Emañ an treuzvarn a oa a-enep d'ar brezhoneg o steuziañ, - re hir e ve displegañ perak,

(**B-14)

met, pa ouzon, tud ar vro a gomz brezhoneg ouzh bugale an emsaverion, hag un dra vat eo e pep keñver evit ar vugale. Da gentañ e c'hellont merzout ez eus tud estregeto o komz brezhoneg, ar pezh n'eo ket anat evit brezhonegerion yaouank o vevañ en estrenvro. D'an eil, e-keñver an dud o-unan, ez eo un doare evito da c'houzout ez eus un Emsav, un Emsav a dud o deus gouestlet kalz da Vreizh. Evel just e ranker displegañ dezho perak e komzer brezhoneg. Hag e komprenont peurvuiañ; n'eo ket lavarout evit-se e heuliont ar skouer, rak ar skouer-se a c'houlennfe diganto kalz muioc'h eget n'int gouest da reiñ; evelkent ez eus aze un doare ensiladur eus an Emsav er gevredigezh. Hervez an degouezhioù ez eo bras pe vrasoc'h; arabat e ve avat gwelout aze un arm politikel.

Un dra all : plas Breizhiz zo e Breizh. E Breizh e vez renet ar stourm brezhon. Evel just pa vo diorreet ur strollad politikel e vo roll tud'zo bezañ e Bro-C'hall evit kefridioù arbennik. An hini a vo e bal tennañ arc'hant digant Breizhiz pinvidik korn-bro Paris a ranko chom e korn-bro Paris diouzh ret. Seurt kefridioù, oc'h amplegañ un ober dispac'hel o treiñ, a dremenno a-raok ar selledoù all, tiegezhel da skouer.

**B

An emsaver e kevredigezh an Emsav.

Gwelet hon eus agentaou emañ an emsaver dirak teir c'hevredigezh : kevredigezh an dud e Breizh, da lavarout eo ar gevredigezh krouet gant ar Stad C'hall gant danvez ar boblañs vrezhon - emañ dirak an Emsav evel kevredigezh hag emañ ivez dirak ar gevredigezh da zont, ar gevredigezh en deus da grouiñ. Anat eo, ar gevredigezh en deus da grouiñ a zle disoc'hañ diouzh ar gevredigezh a zo o ren en Emsav. An Emsav a zle kreskiñ, dont da vezañ ar gevredigezh nevez brezhon, ha war un dro distrujañ ar gevredigezh c'hallekaet. Ster an dispac'h eo kement-se : distrujañ ar gevredigezh kozh ha sevel ur gevredigezh nevez en he lec'h, - n'eo ket distrujañ an dud, met an darempredoù a zo etrezo, etrezo hag ar stadelezh. Ar gevredigezh a zo er maremañ e Breizh n'he deus kreizenn ebet enni hec'h-unan. Tolpet eo, dre un nerzh diavaez ha n'eo ket dre an dibaboù he deus graet hec'h-unan, ouzh ar gevredigezh c'hall. Gant ar C'hallaoued e vez kemeret kement disentez a sell outi. N'hon eus ket da welout hag-eñ ez eus lodoù eus ar gevredigezh c'hall a zo en hevelep degouezh hag ar gevredigezh vrezhon, se ne sell ket ouzhimp, met ouzh an dud a ra al lodoù-se eus poblañs Vro-C'hall. Da lavarout eo : ar gevredigezh vrezhon n'eo ket ur gevredigezh wirion pa n'he devez nepred an tu da welout war he zonkadur hec'h-unan. Divizet e vez pep tra eviti, n'he deus-hi

(**B)

nemet plegañ d'ober bepred. Diyac'h eo se. Neuze, Breizhiz a zo gwad dindan o ivinoù, pe a ya da C'hallaoued, a ya da chom da bParis hag eno e renont ur vuhez kevredigezhel wirion, pe neuze e teuont d'an Emsav.

Pal an Emsav eo dres lakaat an dud e Breizh da zibab etre an daou ziskoulm yac'h-se. Pe neuze dont da C'hallaoued da vat, bezañ Frañsizion diazezet war bParis, pe dont da Vreizhiz diazezet warno o-unan, o kemer o divizoù evito o-unan, evit o bro. Al labour-sklaeraat-se eo roll an Emsav. Ur roll politikel eo, met ivez ur roll buhezel.

Setu perak e ranker plediñ ken aketus gant buhez an emsaver. Ne c'hell ket kaout, anat eo, forzh petore buhez.

Stummet e tle bezañ an emsaver adalek ar poent kentañ betek an hini diwezhañ. Pal ar stummidigezh-se zo ober anezhañ un den oberiat, - e-lec'h an den gouzañvat ez eo ar Breizhad gallekaet. An emsaver zo da gentañ un den a veiz e vuhez, evezhiek ouzh kement tra a ra, hag ouzh kement heuliad en devez ar pezh a ra. N'eo ket un hinienn distag diouzh pep kevredigezh; un den a gedvuhez eo, ur c'hrouer a gedvuhez. En Emsav hon eus anavezet tud youlet mat, a c'hoantae mad Breizh hogen a chome en o c'horn. An emsaver ne c'hell ket bezañ diouzh skouer seurt tud. Diorren a ra darempredoù gant an emsaverion all hag amparañ ganto aozadurioù labour. An emsaver eo an hini a gemer perzh e labourioù hag e kevredigezh an Emsav.

An darempredoù en devez an emsaver e diabarzh an Emsav zo a zaou seurt. An darempredoù labour, darempredoù a genurzh, a vez reizhet gant ar framm e-unan : an holl ac'hanomp emamp dalc'het en ur reizhiad liammoù kefridiel a zo deuet bremañ evel eskern hor buhez pemdeziek. Ouzhpenn an darempredoù kalv-ezel-se e tiwan dre ret darempredoù buhezel, rak en em stagañ a reomp kenetrezomp da sevel ur gevredigezh nevez. Meur a wech e-pad an devezhioù-mañ hon eus komzet eus mignoniezhoù an emsaver. Un dra a verzomp buan : mont a ra da get ar mignoniezhoù e-maez Emsav. Aze e weler ne c'hell ket ar vuhez prevez evit an emsaver bezañ distaget diouzh ar vuhez foran.

Bremañ, petore darempredoù en devez an emsaver gant an dud dre vras e Breizh ? Gwelet hon eus petra soñjal eus an "emsaverion"-se a glaske marmouzañ ploueziz ar C'hornog hag eus ar vruderion-avel a vicher. Gwelet hon eus ivez penaos ha perak e oa rouez a-walc'h c'hoazh an darempredoù politikel etre an Emsav ha peurrest ar vro. Ouzhpenn an darempredoù politikel ez eus avat un urzh all a zarempredoù, donoc'h ha karget a dalvoudegezh. Aze e ranker kompren ez eo an emsaverion tud o devez meur a enkadenn da dreuziñ : enkadennoù buhez, enkadennoù spered, enkadennoù kevredigezh, hag all. Rankout a reont, evit chom emsaverion, n'eo ket bepred diluziañ an enkadennoù, met reiñ ur ster dezho. Ha, tra pouezus, enkadennoù an emsaver zo

(**B)

an hevelep re, gant un dremm nevez avat, hag enkadennoù ar bobl vrezhon a-bezh. Displegañ a ran dre reiñ ur skouer : emañ an emsaver evel ar Vrezhoned all er-maez eus ar bed gall, ken e-keñver sevenadur, ken e-keñver armerzh, politikerezh, hag all; hag er-maez emaint eus ar bed gall peogwir eo bet Breizh a-viskoazh er-maez eus kreizennoù-krouiñ ar bed gall, o vezañ m'he doa-hi en he c'herz he c'hreizennoù-krouiñ dezhi, kreizennoù-krouiñ ar bed brezhon. Enkadenn an holl an denn dres d'an diouer a greizennoù-krouiñ bev e Breizh; Breizhiz dre vras ne welont diskoulm ebet, o vezañ ma ne veizont ket an enkadenn en he ster gwirion, ha ne ouzont nemet, n'eo ket dienkañ, met diankañ, da lavarout eo tec'hout dre zistroioù darnel, hiniennel a denn holl en un doare pe un all da beurzistrujañ o fersonelezh vrezhon; an emsaver en enep a anavez ent-sklaer ster gwirion, istorek ha speredel, an enkadenn m'emañ ar Vrezhoned hag eñ en o zouez; hag an dremm nevez a ro-eñ d'an enkadenn, n'eo ket hini un hent d'ar peurzistruj, met hini hent an adsavidigezh. Ne glask ket diankañ, ne glask ket ivez dienkañ e-unan, - pezh a zo, dav eo henn merkañ, un tentadur evitañ, - met digeriñ a ra un hent d'e genvroiz : ar re-mañ oa techet da zistrujañ kement aspadenn eus ar bed brezhon-kent, eleze kement skoilh a oa etrezo hag ar bed gall; stagañ a ra-eñ da grouiñ ur bed brezhon nevez. Dezho he deus an enkadenn dremm un arallekaat, dezhañ dremm krouidigezh ur bed. Setu perak ez eo ken pouezus evit pep emsaver studiañ e vuhez, rak dre deurel sklerijenn war e gudennoù personel e taol ivez sklerijenn war gudennoù donañ ar Vrezhoned all.

An emsaver enta n'eo ket un den a zo er-maez eus ar bobl vrezhon met un den a zo krog da gompren ster gwirion an enkadennoù m'emañ ar bobl vrezhon. An doare a gemer d'o diluziañ en e vuhez a zle bezañ an doareoù o devo e genvroiz da ziluziañ o enkadennoù d'o zro. Houmañ eo neuze ar gudenn : reiñ ur ster hollek ha politikel d'an doare ma tiluz-eñ, pe da nebeutañ ma sklaera e enkadennoù dezhañ. Adalek ar mare m'en devo an Emsav lakaet en ur yezh politikel splann kudennoù buhez ar bobl vrezhon, e kemero un nerzh bras e Breizh, rak n'eo ket ar galonegezh a vank d'an emsaverion na d'ar Vrezhoned all met ar skiant eus pezh a zo d'ober. Evel just, ker e kousto distrujañ ar Stad C'hall e Breizh, ha keroc'h c'hoazh sevel ar Stad Vrezhon. Feiz hon eus ez eo ar Vrezhoned gouest da baeañ ar priz; an emsaverion avat a zle bezañ prest da baeañ ar mizoù kentañ. Gwelout a rit aze, an darempredoù etre an emsaverion ha peurrest ar bobl zo darempredoù liesek e gwirionez, rak mont a reont eus ^{kemer} pep poent a vuhez prevez ha buhez foran an emsaverion d'an hevelep poentoù a zo e buhez an dud e Breizh.

Kement-se ne denn ket e bouez diouzh an tu kalvezel, pleustr-ek. An Emsav evel aozadur rakstadel a raio ul labour politikel resis e-keñver an darvoudoù a vo, met an diazez, ha ster donañ

(**B)

pep obererezh emsavel a chom hemañ : an emsaver eo an hini a ziluz an enkadennoù m'emañ evel Brezhon hag a heñch pobl Vreizh da ziluziañ an hevelep enkadennoù en he buhez dezhi.

Evit dastum, setu a c'haller lavarout : an emsaver zo da gentañ un den stummet en deus desket an emsavererezh evel ur vicher. Ar vicher-se avat n'eo ket distag diouzh e vuhez. E vuhez eo. En un doare ez eo buhez an emsaver lec'h-imbourc'hañ, lec'h-arnodiñ, lec'h-sklaeraat, lec'h-sturiañ ar bobl vrezhon. Un embregerezh yac'h eo an Emsav, o vont en-dro gant berzh ha gounid, en ur ger : dellezek a fiziañs; ennañ e lakaio dre ret ar Vrezhoned o fiziañs; ne gilint ket razañ evel m'o deus graet betek-henn dirak al luskadoù a venne komz en anv Breizh hep talvezout ar fiziañs a c'houlennent. Kement-se zo lavarout ivez ne c'hell ket an Emsav bezañ ur frañmasonerezh, ne c'hell ket bezañ un noblañs, ur vrientinelezh nevez e Breizh. Ne c'hell ket en em veizañ evel distag diouzh pobl Vreizh. N'eus anezhañ nemet ul lodenn eus pobl Vreizh a zo o kompren kudennoù pobl Vreizh. Ur fazi zo bet graet gwechall pa gomzed eus an Emsav hag ar bobl evel daou dra distag. Ur fazi bras e oa, rak ne c'hell bezañ diforc'h ebet : an Emsav eo ar bobl.

**4-B Disrannadur Breizh diouzh Bro-C'hall a vo graet en ur mare fall evit Breizh. Ni a c'hortozo eta en dienez an disrann-se, kalz ac'hanomp er-maez eus Breizh.

**K-4 Da lavarout eo, pa vo pobl Vreizh er baourentez vrasañ eo e tarzho an dispac'h, mar komprenan mat ar goulenn. Me 'gred ez eus div gudenn aze. Bez' ez eus kudenn ar boblañs hec'h-unan ha kudenn an emsaverion. Evit an emsaverion, ne gav ket din e c'haller lavarout o deus kemeret skiant eus enkadenn o bro pa oa gwashoc'h an traoù evit Breizh, evit an darn vuiañ eus ar Vrezhoned. Er c'hontrol, ar re a zo deuet da gemer skiant, da emouezañ ouzh enkadenn Vreizh a oa tud o doa tec'het diouzh an isdiorreadur endeo, da lavarout eo a oa deuet a-benn da gaout deskadurezh ha zoken plasoù uhel a-walc'h. En enep, ar bobl a c'houzañv gant an isdiorreadur n'he deus ket emouezet c'hoazh ouzh hec'h enkadenn. Neuze e c'haller lavarout n'eo ket ret en em gavout en ur stad isdiorreet evit kemer skiant eus enkadenn ar vro. Evelato ur wirionez zo er goulenn-se, da lavarout eo evit ma savfe dispac'h e-touez ar boblañs eo ret d'an enkadenn armerzhel, da enkadenn Vreizh dre vras mont war washaat, e seurt doare ma vo buhez evel dic'houzañvadus, - buhez, rak keal keñverel eo ar baourentez, - ha d'ar mare-se e krog ar boblañs d'en em sevel. Peurvuiañ, evel ma welomp bremañ, e ra hep pal resis ebet, da lavarout eo en un doare dall, - gwelit emsavadegoù ha displegadennoù ar gouerion er mare-mañ. D'an emsaverion eo da gorvoiñ an emouezadur-se, a zo

(**K-4)

dister c'hoazh, reifñ ur ster d'ar stad a isdiorreadur emaint enni evit o lakaat da gompren eus pelec'h e teu an isdiorreadur hag evit o lakaat da gemer hent an Emsav a-benn diskoulmañ o c'hudennoù, - da lavarout eo kemer hent ar Stad Vrezhon a-benn diskoulmañ kudennoù gwallengav ar vro.

Div zremm zo enta d'ar gudenn. Evit an emsaverion ez eo al lusker ur gwel emouiziek eus an traoù, - int o deus meizet e oa kiriek da wallstad Vreizh bezañ stag ouzh Bro-C'hall. Tremenet int eus pazenn ar buhezadur personel teñval, dangorek, d'ur gweladur hollel sklaer, ergorek, eus kudennoù Breizh. Er c'hontrol emañ ar boblañs dre vras war bazenn ar buhezadur teñval ha ret eo e teufe ar bazenn-se da vezañ dizalc'hadus, ar buhezadur-se da vezañ dic'houzañvadus evit ma krogo an emsavadeg, a vo sturiet d'ar mare-se gant an Emsav e-unan.

**B-4 An dispac'h a darzh bepred diouzh ar mennoz o deus an dud eus o stad. E Breizh, lakaomp betek ar brezel, ne wele an dud o stad fall nemet evel un devoud naturel, da lavarout eo en he lakaent da heuliad naturel paourentez douar o bro ha dre-se petra a c'hallent ober anez gouzañv hep klemm ur baourentez kalz brasoc'h eget an hini a zo bremañ, - uhelaet eo kalz ar barr-bevañ keitat e Breizh abaoe ur c'hantved. Ur c'hantved 'zo e oa un dienez spontus o ren e Breizh met ne voe dispac'h ebet koulskoude. Divroañ a rae an dud, dizeriañ a rae ar vro a-bezh, met ne daoled ar bec'h war zen ebet. Natur an traoù o-unan a oa e devoud ar reuzeudigezh. Pell edod diouzh an dispac'h. Dont a ra ur mare avat ma teu an dud da ziskrediñ war orin naturel an droug : mar'd eo fall o stad, mar'd a fall an traoù er vro ez eo marteze peogwir int korvoet gant tud all, ez eo moarvat peogwir emaint e dalc'h ur gouarnamant fall, na bled ket ganto evel ma tlefe ober ur gouarnamant reizh. Dihun an emouezañ politikel eo; an dihun-se avat, a verk derou ar stad rakzispac'hel, ne glot ket dre ret gant ur stad washoc'h eus ar boblañs. An emouezadur a verzomp e Breizh hiziv n'eo ket frouezh ur gwashadur eus an dienez, - en enep, sevel a ra ar barr-bevañ, ha dreist-holl, an emsavadegoù kouerion ne zeuont ket a-berzh ar re baourañ anezho, met a-berzh ar re ar muiañ en o aez. Evel pa lezfe an dienez o tigriziañ nerzhioù dieub a yafe da ziorren ur preder dispac'hel ha da brientiñ an dispac'h. War a hañval ez eo c'hoarvezet an hevelep tra en istor an holl zispac'hioù : ganet e vez bepred ar mennoz dispac'hel e-touez ar renkadoù-etre, ar vourc'hizion, ar re o doa nebeut a-walc'h da c'houzañv gant an dienez; ar re-se eo o deus dihunet an emskiant dispac'hel e gwiskadoù ar boblañs a c'houzañve ar muiañ.

Er mare-mañ e Breizh emamp er prantad rakzispac'hel : emañ ar boblañs a-bezh o paouez merzout n'eo ket droukstad ar vro ur perzh eus natur an traoù, hag o klask emañ ar re giriek.

(**B-4)

Hag e sav a-gleiz hag a-zehou, a-enep d'ar gouarnamant, d'ar mererezh, d'ar frammoù diseurt a gav dirazi, - ne oar ket c'hoazh dibab an enebour, ne oar ket c'hoazh a belec'h e teuio an diskoulmoù. An displegadegoù, an emsavadegoù a ra ne ziskoulmont netra, ha krog eo d'henn merzout. Roll an Emsav e vo lakaat termen d'ar stad rakzispac'hel-se dre reiñ o ster gwirion, da lavarout eo politikel ha broadel, d'an darvoudoù-se, - ne lavaran ket emañ ar ster enno dre natur an traoù, rak n'emañ ket enno a-ziagent, en Emsav emañ, eleze e kreizenn-grouiñ nemeti ar vro, hag an darvoudoù er vro n'o devez ster ebet keit ha ma n'en devez ket an Emsav roet unan dezho.

Met n'eo ket dav da stad an traoù mont war washaat evit ma tarzhe an dispac'h. E Rusia edo ar barr-bevañ o sevel abaoe ur pennadig pa darzhas an dispac'h. En Iwerzhon ivez.

**3-B Displegit, mar plij, ar mennoz : an Emsav eo ar bobl.

**A-3 Ur fazi eo disrannañ an Emsav diouzh ar bobl, rak a-benn ar fin e vo an hevelep tra. Ur fazi eo lakaat an troc'h etre ar bobl hag an Emsav. Ur fazi e ve a-berzh tud an Emsav en em gemer evit tud veur pe tud eus ur ouenn disheñvel, ur mafia. Ad Emsav e gwirionez n'eo nemet ur rann eus ar bobl a zo emouez ouzh kudennoù hag enkadennoù ar vro. An Emsav zo un darn eus ar bobl a zo o sevel er mare-mañ hag a zegas d'he heul ar bobl en he fezh. Setu perak e c'haller lavarout ez eo an Emsav ar bobl.

**15-B Daoust hag-eñ ez eus bremañ un niver bras a-walc'h a emsaverion prest da sevel ur strollad broadel e Breizh ha penaos e soñjit en em glevout ha kenlabourat gant al luskadoù a zo bremañ evel ar MOB hag an UDB ?

**K-15 Bez' ez eus div lodenn er goulenn :

Da gentañ, daoust hag-eñ ez eus a-walc'h a stourmerion, a emsaverion evit sevel ur strollad broadel e Breizh ? Mar greer eus an emsaverion ar re o deus desket ar yezh, a zo deuet da vezañ e gwirionez Brezhoned, ne c'haller ket lavarout ez eus a-walc'h evit ar poent, zoken evit frammañ ar Strollad Broadel. Da'm soñj eta e ranker gortoz c'hoazh e-pad ur pennad evit ma vo pourchaset ar frammoù a zo ret evit sevel ur Strollad Broadel.

D'an eil, penaos e soñjit en em glevout ha labourat gant al luskadoù a zo bremañ evel ar MOB hag an UDB ? Ne gav ket din e c'haller c'hoazh ober ar goulenn-se. Da gentañ e vefe ret anavezout kelennadurezh ar MOB da skouer e-keñver Breizh, e-keñver kevredigezh, e pep keñver o tennañ da vuhez ar Stad evit

(**K-15)

gallout en em glevout. A-raok sevel ur Strollad Broadel e rank-er prientiñ ur gelennadurezh resis, - emeur ouzh henn ober. Pa vo bet prientet ur gelennadurezh resis e vo tu da geñveriañ ar gelennadurezh-se gant hini ar MOB m'en deus unan. Aze ez eus ur gudenn bleustrek. Evit an UDB kemend-all. An UDB marteze en deus ur gelennadurezh resisoc'h eget hini ar MOB. Evit ar poent n'eo ket gwall galonekaus ar pezh a welomp en UDB : n'eus nemet galleg, n'eus nemet gallegerion koulz lavaret, hag ouzhpenn-se o mennadoù n'int ket atav broadel. Ha n'eus forzh penaos eo ret dezho da gentañ prientiñ ur gelennadurezh resis a-zivout holl gudennoù boutin ar Stad, deomp da c'houzout ar chañsoù a zo d'en em glevout. Met adlavarout a ran : ret e vo deomp kaout dirazomp gwir Vrezhoned, da lavarout eo tud o devo peurzesket ar yezh hag o devo graet Brezhoned anezho o-unan, pezh n'eo ket c'hoarvezet er strolladoù a chom Gallaoued peogwir n'o deus ket desket ar yezh ha dre-se n'int ket disheñvel diouzh ar peurrest eus poblañs Frañs.

Mont e-barzh ? C'hwi oar petra eo. Ur framm zo ur framm. Ur strollad a chom ar pezh ez eo. Er MOB ez eus tud a zo er penn abaoe an derou hag a chomo betek ar fin. D'ar mare-se eo koulz mont da sevel ur strollad all. Setu aze an dilenn na c'haller ket tec'hout dioutañ. Kompren a reer e keuzier d'an tammig framm a zo er MOB, - peogwir ez eus un tammig framm. Graet e vez bruderezh war-eeun, hag e gwirionez ez eo ar bruderezh kalonekaus d'ar bruder. En enep, er mare-mañ, ez eo digalonekaus stad an emsaver peogwir e rank chom war al loc'hvan; n'eo ket loc'het c'hoazh ar stourm war-eeun evit ar Stad. Ar strolladoù a ra bruderezh a gav dezho e reont un dra bennak, hag an hini er c'hontrol a zo oc'h en em stummañ a soñj a-wechoù ne ra netra. Un dra bennak a ra peogwir en em ra brezhon, met n'en deus oberiantiz diavaez ebet hag an dra-se a c'hell bezañ digalonekaus, - setu perak en em daol meur a hini d'ar bruderezh, peogwir o deus ezhomm stourm, peogwir o deus ezhomm difr-etañ, - santet e vez un dra bennak. Ouzhpenn-se, an hini a zo c'hoazh oc'h en em stummañ a gav dezhañ e chomo atav er stad-se, en em gav-se. Da'm soñj ez eus aze ur gudenn vredoniell kentoc'h. Arabat chom war an dachenn-se. Mar chomfed da viken war bazenn an emstummadur, e teufe da vezañ ur bredkleñved. Ret-mat eo evelkent kregiñ gant an dra-se, ha diwar se loc'hañ war-du an ober. Da gentañ en em stummañ.

Evit ar poent, un dra diaes eo, e c'houlenner digant an dud ober un akt a feiz en amzer da zont. Dezho da vezañ ne c'haller ket embreger n'eus forzh petra e n'eus forzh peseurt doare e n'eus forzh peseurt degouezh. Da gentañ eo ret gwelout sklaer an hent, divizout ar pazennoù, ha neuze kregiñ ganti. E mod all emeur war var da chom sac'het.

estad-feiz

**B-15 Ar pezh a zo d'ober bremañ eo en em stummañ evel emsaver, da lavarout eo deskiñ brezhoneg evel just; hogen deskiñ brezhoneg n'eo nemet ar bazenn gentañ, hag ur bazennig a netra e gwirionez. Deskiñ brezhoneg ha kaout o buhez e brezhoneg a c'houlenner da gentañ digant an dud. Anez deskiñ brezhoneg ne c'haller ket mont e framm an Emsav. Ret eo soñjal ez eo al labour-se ul labour a netra, ul labourig, al labour kentañ; rak al labour a zo d'ober goude zo ramzel. An hini n'eo ket gouest dre e leziregezh pe dre ziouer a urzh pe me oar da dremen ar bazenn gentañ, da lavarout eo adframmañ e vuhez e brezhoneg n'eo ket deuet e vare da zont d'an Emsav. Goude-se deskiñ ar vicher. Ne c'haller ket goulenn digant un den en deus lakaet e droad ur wech en ur skol a vezekniezh mont da vezeg. Youl vat en deus. Fellout a ra dezhañ reiñ ar yec'hed d'an dud, met moarvat ne vo ket evit ober kalz a vad dezho. Evit bezañ emsaver, e ranker tremen ivez dre ur stummadur a zo ur stummadur hollek hag arbennik war un dro, politikel, armerzhel, sevenadurel, istorel, emsavel en ur ger.

**6-B Daoust hag-eñ e vo ret d'an Emsav tizhout an niver-mañ-niver a dud a-raok bezañ gouest da ober e roll e Breizh ?

**B-6 Hervez ar stad ma vez degouezhet an Emsav, e c'hell tizhout al live-mañ-live er boblañs : ur rummadur zo er boblañs diouzh derez ha doare ar gizidigezh ouzh ar c'hudennoù emsavel, da lavarout eo politikel-broadel. Hervez an hent en devez lezet e-biou, hervez e sevenadennoù, e tizho uhel pe uheloc'h er skeuliad-se a rummadoù. Met en ur mare lavaret ez eus bepred ur rummad pe unan all a zo aesoc'h da dizhout, hag ivez ez eus ezhomm eus ar rummad-mañ-rummad kentoc'h eget eus ar re all. Da skouer er mare-mañ e vez pledet dreist-holl gant ar re a vo sternioù an Emsav, da lavarout eo e klasker tud a c'hell bezañ stummet buan a-walc'h ha bezañ stummerion d'o zro. Ur wech ma vo amparet ar sternioù-se e c'hallor tizhout seurtoù all a dud.

Amañ ez adkaver kudenn ar yezh. Rak ur wech ma vo diazezet ur framm-ober er vro, ur framm oc'h arc'hwelañ e brezhoneg, e vo graet bruderezh e-touez ar boblañs, hag ar bruderezh-se a vo graet er yezh anavezet gant ar boblañs ha diouzh an doareoù gwellañ da dizhout ar boblañs, da lavarout eo e galleg. Aze e ranko an Emsav krouiñ kevrannoù, - brezhoneger evel just, - a raio gant arm ar galleg war an dachenn-ober merket dezho. Rankout a ra an emgannerion en em azasaat ouzh pep degouezh ha kemer an hentoù gwellañ hag efedusañ evit kas al labour war-raok. En abeg da ziaesterioù divoas, ha yezhel, ar brezel o devo da ren, e rankont bezañ tud stummet ha peurstummet.

